

TREDE

Third Revelation

Terceira Revelação

DISKULIADUR

NIVERENN 24

SÃO PAULO (BRASIL)

DU 1960

ELIA HA YANN VADEZOUR.- En dro-mañ e kouviomp hol lenherien, da nebeutan ar re anezho o deus ar Bibl, da lenn peber pe bemp arroudenn eus ar Skriturioù, merket amañ da heul, hag a zo enno traoù souezhus.

Da gentañ, en Testamant Kozh, III Rouaned, pennad triwec'h, adalek ar gwerzad daou-ugent. Amañ e reer anaoudegezh gant tri den: Akab, ur roue; Yezabel, e wreg, hag Elia, un diouganer. Hemañ a heuilh lezenn Voizez, an daou all a azeul Baal. Elia, evit prouñ emañ gant an doue gwirion, a ginnig sevel daou vern keuneud, unan evit diouganerien an doue Baal, hag unan all evitañ, Elia, ha lakaat tan enno, dre vertuz o fedennoù hepken. Graet e voe evel ma kinnigas Elia, Beleien V-Baal, pevar c'hant hag hanter-kant anezho, en em vod dirak o bern keuneud hag a bed e-pad ur beurevesh a-bezh. Pediañ a reont en aner: taam tan ebet er c'heuneud. Elia, en, goude bezañ lakaet silepel seilhañ dour war e vern keuneud, a ra ur bedenn ha diouzhtu e krog an tan er c'heuneud gleb. Deut eo ar maout gentañ. Ur fazi a ra da c'houde, avat, o lakaat herzel ar pevar c'hant beleg hag hanter-kant, ha lakaat dibennañ anezho war an taol. Yezabel, ar rouanez, a ya droug enni. En hevelep levr, pennad naontek, gwerzad daou, e c'heller lenn ez eo barnet Elia d'ar marv. An diouganer, evit mirout e vuhez, a rank tec'hout kuit.

Bremañ, araoñ tremen d'an Testamant Nevez, taolit ur sell war V-Malaki, pennad pevar, gwerzad pemp, elec'h ma diouganer distro Elia war an Douar.

Troomp un nebeud pajennoù eus an Aviel hervez Mazhe ha lennomp ar pennad pevarzek anezhañ, gwerzadoù unan betek daouzek. Amañ e reomp anaoudegezh gant tri den all: Herodez, gouarnour Galiles, Herodiaz, e c'hoar-gaer, ha mestrez dezhañ, ha Yann Vadezour, un diouganer. An tri den-mañ a gavomp, dre vras, en hevelep divizoù hag an tri gentañ: Herodez, evel Akab, mestroniet gant ur vaouez; Herodiaz, evel Yezabel, o kasaat diouganerien an doue gwirion, ha Yann Vadezour, evel Elia, oc'h enebiañ ouzhañ an daou all. En hevelep bro, pe dost, emaint ivez. Bez e c'hellfemp soñjal... Met gortozomp. Ar vaouez ar wech-mañ a gas da benn he mennad: lazhañ an diouganer (e benn a zo degaset dezhi war ur plad), ha Yann Vadezour, an hini a oa bet Elia, a bae an die en doa kemret un nebeud kantvedoù araoñ. Ya, bez e c'hellfemp soñjal, ha kala tud a soñj e gwirionez, ez eo Herodez adenkorfadur Akab hag Herodiaz adenkorfadur Yezabel. Marteze awalc'h, hogen er pezh a sell ouzhañ Yann Vadezour ne c'hellomp ket douetiñ: en a zo Elia. Jezuz e-unan eo hel lavar deomp (Mazhe : XI-14 ha XVII-12/13)!

TREDE DISKULIADUR

Parabolenn an dreog

(Mazhe: XIII-24/30)

Kinnig a reas dezho (Jezuz) ur barabolenn all, o lavarout: Rouantelezh an Nenvoù a zo heñvel ouzh un den, a hadas had mat en e bark, hogen e-keit m'edo an dud o kousket e teuas an enebour, a hadas dreog e-touez ar gwinizh, hag a yeas kuit. Ha pa greskas ar yeot, ha pa roas frouezh, ez en em ziskouezas ivez an dreog. Neuze, sklaved mestr an ti, o tont, a lavaras dezhañ: Aotrou, n'ac'h eus ket hadet had mat ez park? A belec'h, neuze, e teu an dreog? Eñ, evelato, a respontas dezho: un enebour a reas an dra-se. Hogen ar sklaved a c'houlennas outañ: Ha fellout a ra dit ez afemp da dennañ an dreog? Nann, a eilgerias eñ, gant eon, pa viot o tispartiañ an dreog, na dennfec'h ivez gantañ ar gwinizh. Lezit anezho da greskiñ a-gevret betek an eost, ha da vare an eost e livirin d'ar vederien: dastumit da gentañ an dreog, grit jelpennoù anezhañ, da vezañ devet, hogen an ed, hen dastumit em grignol.

Jezuz a ouie mat-tre petra a c'hoarvezfe gant e Gelou Mat. Mervel a rafe, mouget gant an dreog, e kalonoù sklaset tud an Douar. Mervel a rafe hogen evit dasorc'hin diwezhatoc'h: "Ur pennad ha n'am gwelot ken; hogen ur pennad all, ha va gwelout a reot". (Yann-XVI-16). "Mat eo evidoc'h ez afen kuit, rak mar ne dan ket kuit ne deuy ket davedoc'h ar Frealzer; mar dan, evelato, e kasin anezhañ deoc'h". (Yann XVI-7).

Er barabolenn-mañ e weler sklaer penaos e c'hoarvezas an taol: an dud, da lavarout eo ar gristenien, e gouskas hag e-keit n'edont o kousket e teuas an enebour, a hadas dreog er park. Gwelomp da gentañ piv eo an enebour-se ma komz anezhañ Jezuz Krist. An enebour-se eo speredoù an denvalijenn. Ar speredoù ur wech dilezet ganto karc'har ar c'hig - a zistro da arnodva an natur hag a ya da ober korfoù all - a chom en-dro d'an Douar, oc'h ober lod eus poblañs speredel ar blanedenn da c'hortoz ma vo roet tro dezho da adenkigañ, pe ma vezint rediet d'hen ober. En em vodañ a reont en ec'honder hervez o natur. Ar re a zo heñvel a ya a-gevret. Mont a reont war-eeun d'al lec'h a zere outo. Ar re fall n'en em gemmeskont ket gant ar re vat. Kement-mañ a c'heller lenn e parabolenn an den pinvidik ha Lazar (Lukas XVI-19/31). Lazar (Jezuz a roas e anv), an hini a oa bet paour, a oa en ul lec'h a levenez; egile, an hini a oa bet pinvidik (Jezuz ne roas ket e anv), a oa en ul lec'h a boan. Goulenn a reas an hini a oa bet pinvidik ma vefe lavaret da Lazar dont betek ennañ ha glebiañ dezhañ e deod, kement a sec'hed en doa el lec'h-se. Neuze e voe respontet dezhañ: "re an tu-mañ n'hellont ket ^{moñ} du-bont, ha re zu-bont n'hellont ket dont du-mañ".

Evit ar re o deus un tamm anaoudegezh eus ar Skriturioù e tle bezañ un dra anat al levezon a embreger ar speredoù dienkorfet war vuhez ar blanedenn. Ar Speredoù n'int ket bet ijinet gant ar Speredegezh.

Ar Speredegzh ne ra nemet dizouarañ teñzoriet an Aviel en ur gouañ ar pezh a zo bet lavaret gant Jezuz, hag adlakaat an traoù en o lec'h. Hep ehan e komzer eus speredoù er Bibl. En Aviel hervez Mark (V-1) e komzer eus un den soa piaouet gant ur gwall-spered; chom a rae er beziou ha ne c'helle den dont a-benn outañ; ken bras e oa e nerzh na torre e chadennoù pa veze gallet e stagañ.

En Oberoù an Ebestel ez eo stankoc'h c'hoazh ar menegoù a reer eus speredoù. Setu-amañ adarre skouer unan fall (Oberoù an Ebestel, XIX-15): Tud o welout Paol o kas speredoù kuit en ur lavarout "en anv Jezuz kae kuit eus an den-se", a glaskas int ivez ober evel an abostol brudet. Hogen unan eus ar speredoù fall-se ma c'hourc'hemenn-jont dezhañ mont kuit a respontas d'an deskarded: "me a anavez Jezuz, ha gouzout a ran piv eo Paol; hogen c'hwi, piv oc'h?" Hag ar spered-se, oc'h en em servij eus korf an den piaouet gantañ, a dagas ar brezegennerien, a c'houlias anezho hag a dennas diganto o dilhad.

Evit kompren mat levezon ar speredoù dienkorfet warnomp e ranker gouzout kement-mañ: ar spered, pa zilez e gorf, a gendalc'h da vezañ an hini a oa araok. Arabat krediñ ez a da gant hepken ablamour m'en deus kavet, sañset, e frankiz. Ar re izelañ eus ar speredoù a zo evel chas o deus torret o chadenn hag a chom memes-tra e-kichen o loch. Santout a reont naon, sec'hed, riv, tomder, hag alies ne ouezont ket ez int "marv". An dra-mañ zoken, evit ar speredoù warlerc'hiet, a zo ar reolenn. Ar ouezidi, ur wech marv, a vez souezhet o welout ne vez ket graet van outo ken, ha gant an amzer e teuont da grediñ ez int bet kaset d'ur meuriad all, ne ouezont ket penaos. Tud oc'h ober brezel a gendalc'h d'en em gannañ hep bezañ merzet o deus lezet o c'horf fetis war an dachenn. Tud all a vez e vez kaset o c'horf d'ar vered hag a zistro d'ar gêr, hep o c'horf, da glask reiñ da gompren d'o zud kar, p'emañ ar re-mañ o kousket ha ma c'hellont kantreal war an hevelep leurenn hag ar re varv, n'int ket marv tamm ebet. A-pediñ a reont: "me n'on ket marv, tennit va c'horf diouzh ar bez!" Lod, a oar ez int "marv", a chom stag, dre aon, ouzh o c'horf yen, betek ma sav ar preñved warnañ. Lod a lak meur a vloaz da c'houzout ez int marv!

Ar speredoù warlerc'hiet a zo kerse ganto d'o c'horf, rak ne blij dezho nemet santadurioù ar skiantoù, ha peogwir ne c'hellont tañva netra, drezo o-unan, eus ar bed danvezel, e tostaont ouzh o breudeur enkorfet hag e vroudont ar re-mañ da ober ar pezh a garfent-int ober. Hol lennerien a anavez sur awalc'h en o farrez paour kaez tud, paotred ha merc'hed - a vez roet dezho zoken an aliesañ ul lezany bennak - ha n'int ket gouest da zerc'hel gwenneg ebet en o yalc'h. Diouzhtu e rank beza lakaet en ur bann odivi pe en ur bann gwinn. An dud-se a zo sklav da speredoù nebeut emdroet. Broudet e vezont da evañ gant speredoù izel a blije dezho an hini kreñv pe an hini dous pa oant bev; analat a ra ar speredoù-se an aezenn a zeu diouzh skevent an everien. Heverk eo ez eo diaes e c'hoarvezfe ganto un dra bennak fall, estreget bezañ sklav; un Doue a zo evit al lonkerien, a leverer. Doue a roas dezho un ael gwarezour, evel da bep hini ac'hanomp, ha bremañ o deus kavet ur gwarezour all, a ziskouez e anaoudegozh-vat en ur virout na c'hoarvezfe droug ebet d'e "alambig".

Speredoù izel a c'hell reiñ kleñvedoù d'ar re enkorfet, alies ar c'hleñved o doa p'edont o vevañ war an douar, rak an darn vrasañ eus kleñvedoù ar c'horf ne dint nemet distaol kleñvedoù ar spered war ar c'horf. Se, kennebeut, n'eo ket bet ijinat gant ar Speredegzh. Lennomp kentoc'h (Mazhe IX-32/33): "degaset e voe dezhañ (da Jezuz) un den mat ha piaouet gant un diaoul (1) ha, pa voe kaset kuit an

(1) Spered izel, vil.

diaoul, e komzas an hini mut. Hag en Aviel hervez Iukas (XIII-11/13): "Jezuz oc'h antren er sinagogenn a welas ur vaquez a oa kemeret triwec'h vloaz'oa gant ur spered klañv hag ablamour da se e oa daou-bleget ha ne c'helle ket eounañ he c'hein".

Speredoù warlerc'hiet evel-se, dizesk ma'z int, ne reont droug nemet d'un den hepken bep gwech, an alligañ atav d'an hevelep hini, mar dint servijet mat gantan. Ar re washañ, evelato, hag a-bell, eo ar re o deus en em ziskleriet a-enep ar C'hrist. Dre ul levr resevet digant André Luiz (1) hon eus un alberz eus petra eo seurt speredoù hag o oberiantiz. Danevellañ a ra André Luiz deomp el levr-se istor ur spered poellek ha desket, met lorc'hus hag hep tamm karanteg ebet. Gregoar eo e anv. Kompren a reer ez eo bet pab ar wech diwezhañ ha vevas war an Douar. Boaz evel ma oa da welout an holl o taoulinañ hag o krenan dirazañ, e oa deut da grediñ e oa un doue. Mont a reas, pa "varvas", d'al lec'h merket evit an dorfedourien. Pa grog an danevell e welomp anezhañ oc'h ober eno ar vicher a varner. Didruer eo ouzh ar re a rank dont d'al lec'h-se. N'eo ket holl. Ar re a ya d'al lec'hioù a boan ne chomont ket aze da viken: "pardonet" e vez dezho, da lavarout eo, roet e vez tro dezho da zasprenañ o fasioù, ha gant plijadur ez asantont distreiñ war an Douar evit klask ober gwelloc'h, zoken ma rankont kaout ur vuhez c'harv amañ. Ma, Gregoar a glask heskinañ anezho - dre hanterouriezh ar vevelienn niverus a zo dindanañ, speredoù kriz eveltañ - hag o lakaat da c'hwitañ en o firc'hirinañ nevez war an Douar. Ne fell ket dezhañ e chomfe war hent ar vertuz spered ebet eus ar re a oa dindan e veli; arabat eo dezho dont da vezañ mat; an hini a rankont servij eo an Aerouant ha neket an Oan.

Dre betra e vez anavezet ur spered izel? Dre an emgarantes, al leziregezh, al lorc'h, ar wallentez, ar c'hrizder ha sioù all. E vrasañ plijadur a zo ober droug d'ar re all, dres ar pezh a ra ivez plijadur ar speredoù izel enkorfet. Ar speredoù vil a vev o c'hoari troioù kamm d'ar speredoù enkorfet dizesk er pezh a sell ouzh buhez ar spered (2). Sunañ a reont o nerzh; en em servij a reont anezho evel eus slambiked; enebiñ a reont ouzh ar re a labour, ha dreist-holl ouzh ar re a labour evit en em sevel er speredelezh. Perak e kavomp ken diaes a-wechoù kregiñ gant hol labour? A-vec'h ma'z omp azezet ouzh an daol-skrivañ setu ma teu naon pe sec'hed deomp; d'ar vutunerien e teu c'hoant lakaat ur c'horniad; gwechoù all e teu c'hoant deomp mont da bourmen. Pa generomp ul levr kelennus da lomm e teu poan benn deomp, pe c'hoant kousket. Se a zo labour speredoù an deñvalijenn. En enep, mar kemerit ur romant fell bennak, ennañ traoù kigus, ez ay ho c'hoant kousket kuit, ha mar fell deoc'h skrivañ seurt traoù, neuze, avat, e viot sikouret gant ar speredoù-se.

Jezuz a erbedas deomp bezañ war evezh ha pediñ. Dre al levrioù a resever bremañ niverus digant ar speredoù e ouezomp kalz a-zivout oberiantiz speredoù an deñvalijenn hag a-zivout efed ar bedenn. Bez e oa un den, a lennomp e unan eus al levrioù-se, a yae atav daou pe dri spered war e lerc'h kerkent ha ma yae d'e labour diouzh ar beure. Chom a rae ar speredoù-se war e dro e-pad an deiz, o klask c'hoari troioù kamm dezhañ. An den-se n'en em sante mat neblac'h nemet er gêr. Pa zistroe d'ar gêr e veze ambrouget atav gant an hevelep speredoù. Soudrus e oa evelato o welout e chome ar speredoù-se e toull an nor. Petra a c'hoarveze ganto? Gwreg an den-se, anezhi ur plac'h fur ha kristen, a bede ur wech an amzer, a galon, e-pad an deiz, hag

(1) "Libertação" (Disubidigezh).

(2) D'ar speredoù all dienkorfet n'hellont ket ober peogwir er bed-all e lenner mennozioù ur spered all evel en ul levr digor. Aze, eta, n'eus tu ebet da douellañ.

an ti a-bezh a veze kelc'hiet gant un "orjalenn" c'houlou, a lakae doujañs er speredoù vil hag a vire outo a vont tre. En ti-se e rene ar peoc'h.

Anat eo neuze ne fell ket da vistri ar speredoù izel, d'ar re an Aerouant, e vije anavezet o oberiantiz, na zoken o bezañs, nag e vije gouezet penaos en em wareziñ outo. Se a lakafe an dud da vezañ war evezh hag a dennfe neuze o flijadur digant ar speredoù warlerc'hiet. Piv, o c'houzout seurt traoù, a asantfe c'hoazh, da skouer, servij da alambig d'ur spered vil? Den, nemet gwall vil e vefe e-unan. Setu perak e lavare Jezuz: "ANAVEZIT AR WIRIONEZ HAG AR WIRIONEZ HO KRAY DIEUB". Ar gelenn gristen, eta, a laer digant ar speredoù izel o freiz. Da c'hortoz e oa neuze o dije graet o mistri ar pezh a c'helljont evit mirout n'en em skignfe dre ar bed. Ha penaos hen mirout? Ar Gristenion wirion ne oant ket chalet gant ar binvidigezh, na gant an enorioù; n'o doa ket aon rak ar marv. Lakaat lazhañ anezho? Jezuz a gavfe reoù all da gemer o lec'h. Gwidreüs evel ma'z int, speredoù an droug a welas ne oa nemet un hent da vont dezhi: dre zindan, dre drubarderezh, dre bilpouserezh. An hent a gemerjont a voe "hadañ dreog e-touez ar gwinizh". Sed ar pezh a rejont, hag ar pezh a gendalc'hont da ober betek bremañ. Ha petra a dalv ez-resis "hadañ dreog"? Hadañ dreog a zo aweniñ ar gristenion zievezh (ar re a "gouskas", gouez d'ar barabolenn) da gemm an traoù bep un tammig, da zistresañ ar gelenn gristen, d'he lakaat da vreinañ. Evel-se, ar speredoù kristen a enkorfje war an Douar, diwezhatoc'h, ne anavezjont ket ken mouezh Jezuz er gredenn gristen ofisiel hag a chomje er-maez eus an emzav relijiel. Ar re a gemerje perzh ennañ memes-tra n'o dije ket awalc'h a enacudegezh da ober an diforc'h etre ar pezh a zo eus Jezuz hag ar pezh n'eo ket. Evel-se, ar pezh a vije anvet kristeniezh ne rofe ket a frouezh mat. Hadomp dreog eta, a larjont, e-touez ar gwinizh, ken na vougo gantañ! Evel-se e voe graet, ha deut eo da vat o zaol ganto. Gwelomp skouer Luter: betek an deiz ma voe lakaat an induljañsoù e gwerzh, Luter ne gavas ket a abeg er pezh a welas en-dro dezhañ; lavarout a reas "amen" d'an holl vreinañ a rene e bed kristen ar mare-se. Gwashañ taol skoet gant speredoù an deñvalijenn gant ar gelenn gristen a zo bet lakaat ar gristenion da devel an abretañ ar gwellañ war geal an Adenkorfadur. Evel ma lavar Annie Besant, "tennet diouzh ar gelenn gristen an Adenkorfadur, setu tennet digant Doue E Vadelezh hag E Reizhded". Ne oa ken netra da gompren enni. Da c'houde-se, neuze, e vije aesoc'h distresañ ar peurrest, en ur reiñ da gomzoù Jezuz, bep gwech ma vije gallet, ur ster danvezel. Kemeromp skouer ar Gomunion, ha gwelomp eñ hevelep amzer perak n'eus ket a "Gomunion" er Speredegzh, a zo azginivelezh ar Gristeniezh.

Ar Gomunion a zo deut diwar ar Goan Ziwezhañ, ar goan a zebras Jezuz gant e ziskibien garet nebeut arack dezhañ bezañ harzet. E-touez diskibien Jezuz Krist e oa tud paour hag un nebeudig reoù all hag o doa muioc'hig a vadoù. Lod n'o doa netra da zegas ganto da zebrin. Ar re binvidikoc'h a lakae ar pezh o doa a-gevret, hag ar boued-se a veze ingalet etrezo holl; ne chome den hep tamm. Setu ster kentañ ar Gomunion: roit bara d'an hini n'en deus ket. An arouez eo ar bara, hogen ar ster anezhañ a zle bezañ ledanaet evit talvezout an holl vadoù danvezel a ra diouer d'an dud evit bevañ: boued, dilbad ha ti.

Jezuz, p'en em vode da vare koan gant e ziskibien, a gendalc'he gant e labour a vestr. Ar pezh en doa Jezuz da lavarout d'an dud ne c'helle ket bezañ komprenet mat d'ar mare-se. Ablamour da se e konze an aliesañ dre barabolennoù, da lavarout eo, dre sevel kenveriadennoù etre ar pezh a oa anavezet gant an holl hag ar pezh a oa deut da zeskiñ d'an dud. Penaos displegañ, da skouer, petra oa ar vuhez speredel? Ret mat e voe dezhañ klask un dra war an Douar hag a c'hellfe,

dre geñveriadur, reiñ un alberz dezho eus ar vuhez speredel. He c'heñveriañ a reas gant ur "rouantelezh", a oa un dra anavezet. Evit displegañ gwelloc'h c'hoazh petra oa ar "rouantelezh" nevez-se, e savas kenveriadennoù all, pep hini anezho o tegas un tammig muoc'h a sklerijenn. Diskibien Jezuz Krist, a oa deut war an Douar evit mont d'e heul, a oa tud a oa kalz ledanoc'h o c'homprenidigezh eus an traoù speredel eget an darn vrasañ eus an dud all. A-wechoù, evelato, ne welent ket re vat kenneheut ster ar parabolennoù, ha neuze e c'houlennent ouzh ar Mestr m'o displege dezho, p'edont o-unan. Seurt goulennoù a veze graet ganto an aliesañ da vare koan; d'ar mare-se ivez e c'houlennent holl ar pezh o doa c'hoant gouzout diwar-benn kudennoù all. Ha Jezuz a roe sklerijenn dezho. Ha setu eil ster ar Gomunion: reiñ sklerijenn d'an hini a c'houlenn bezañ sklerijennet, aroueziet gant ar gwin, a zo anavezet dre e efed war an empenn.

Jezuz, e-pad ar Goan Ziwezhañ, a gomzas ivez eus e zistro da ved ar speredoù: aberzhet e vije hep dale, ha gortoz a ras eus pep hini eus e ziskibien e vefe prest d'en em aberzhiñ ivez evit ar gredenn nevez. Ha d'an diwezh e roas dezho ar gourc'hemenn-mañ: "en em garit kenetrezooc'h".

Pehini an nevezenti gentañ a zo bet degaset d'ar "gomunion"-se? Diaes awalc'h hel lavarout; ar pezh a zo sur eo e voe dievezh diskibien Jezuz Krist hag e-keit m'edont o "kousket" e voe hadet dreog aze, ken ma'z eo deut ar gomunion da vezañ an dra iskie-se anavezet gant an hell, a dalv kemer korf ha gwad Jezuz Krist dindan stumm un hostienn, hag a zo ken pell diouzh ar Goan Ziwezhañ. Jezuz Krist, na tiskennfe war an Douar bremañ, a vije nac'het outañ ar Gomunion. Evit hen diskouez gwelloc'h e troas emañ un arroud eus ul levry embannet nevez 'zo emañ (1). An aozer, B. Godoy Paiva, en deus un huñvre. Huñvreal a ra e teu Jezuz e-un, emzanvezaet, d'e weladenniñ. Ur sadorn da noz e oa. Tremen a ra an noz en e di. D'ar sul vintin e kinnig Jezuz dezhañ mont d'ober tro-kêr da welout penaos emañ ar bed gant kristenien São Paulo. Mont a reont da gentañ en un iliz katolik elec'h m'emañ ar beleg o reiñ ar gomunion. Tostaat a reont ouzh an Daol Santel, ha daoulinañ, ha gortoz o zro; pa zeu ar beleg tost dezho gant e hostiennoù, hag ar c'hurust gant e bladig, e c'houlenn ar beleg ouzh Jezuz, a vouezh izel:

- C'hwi a zo bet o kofes araok dont da gomuniañ ?
- N'on ket, Aotrou.
- C'hwi a zo badezet en Iliz Katolik?
- N'on ket, Aotrou.
- N'hoc'h ket bet badezet pa oac'h bihan?
- Neuze hoc'h pagan?
- Nann, Aotrou; me a zo bet badezet d'am zregont vloaz.
- E pe iliz?
- Ne oa ket en un iliz; en ur ster e oa.
- Petra? C'hwi 'zo neuze eus ar rann-gredenn protestant-se a vadez
- hec'h izili en ur ster pe en un nev zour ..."

Gant ar protestanted ne deas ket gwelloc'h an traoù: ne voe ket kinniget dezhañ ar "spesoù sakr" war-zigarez ne oa ket "breur"!

Hag e kendalc'her da hadañ dreog! Evit kreskiñ interes an dud en Oferenn - a zo stumm emdroet ar Goan Ziwezhañ - evit dedennañ muoc'h a dud davet an tamploù yen, ez eus bet klasket nevezentioù all, da skouer, degas pagtred ar patronajoù gant o bannieloù hag o zrompilhoù d'an iliz; da geñver ar gouelioù bras, seniñ ar c'han broadel war an ogracu p'emañ Jezuz Krist "o tiskenn war an aoter".

(1) "Quando o Evangelho diz não!" (Pa lavar nann an Aviel!)

An haderien dreog a zo bet oberiant adalek an derou, hag e kement tra a sell ouzh an emsav kristen o deus klasket hadañ o loustoni. Met an dreog n'en deut ket kroget bep gwech. Ur skouer, a c'hellomp menegiñ er c'henver-se, eo hini an trodroc'hañ: panevet edo Paol war evezh hor bije bet ivez er Gristeniezh an trodroc'hañ; espernet eo bet dimp, evelato, a-drugarez d'an abostol brudet, a viras gant e holl nerzh na vije degemeret an euzhadenn-se e-touez ar gristenien.

Speredoù uhel o deus kinniget da Jezuz diskenn war an Douar ha displantañ an dreog; Jezuz Krist, koulzkoude, en deus kavet gwelloc'h gortoz betek an "eost", betek ar mare ma vije aes ober an diforc'h etre an dreog hag ar gwinizh. E gwirionez, ne oa nemetañ, ha speredoù all eus e renk, a oa gouest da ober an diforc'h-se araok mare an "eost", ha ne oa ket en e vennañ kennebeut displantañ an dreog araok ma vije dare. Ablamour da se, kent distreiñ da gaout an Tad e prometis e kasfe dimp ar Frealzer, a vije unan eus e gefridioù pennañ adlakaat an traoù en o lec'h, an eil anezho a vije klokaat e zeskamantoù.

Erru omp bremañ e dibenn ar barabolenn elec'h ma leverer e vo graet jelpennoù eus an dreog, ha lakaet en tan, hag an ed a vo lakaet er c'hrignol. Ar skeudenn a zo dispar. Ne deo nemet ur skeudenn evel-just rak ne vo lakaet na den na netra en tan. Ar gerioù "dreog" ha "gwinizh" o deus kemeret amañ ur ster all. "Dreog" a zo an haderien dreog hag ar re a gred dezho e vez plijet da Zoue gant obidoù ha gant diavesterioù hag a gav dezho ez eo mat pell-zo pa vez graet kement-se. "Gwinizh" a zo ar re a glask o eürusted el labour, er studi, en onestiz, er garantez ouzh ar re all, e servij an nesañ, hag a glask Doue evit o emdroadur ha neket hepken evit o silvidigezh.

Ar re gentañ - an "dreog" - a vo kaset da vevañ war ur blanedenn yaouankoc'h eget an Douar, elec'h ma vo graet ar brasañ mad eus o foell hag eus o deskadurezh da sikour speredoù izeloc'h da sevel. N'eus netra didalvoud er bed-holl: ur spered, daoust pegen izel e c'hell bezañ, a c'hell atav deskiñ unan izeloc'h egetañ. An Douar en e stad vremañ a zo ur baradoz evit paotred an dreog; pa'z aint war ur blanedenn yaouankoc'h e teuy keuz dezho eus an amzer gollet; se eo an "tan", a zevo o c'houstians. Ar re a striv da heuliañ Jezuz Krist e spered hag e gwirionez, ar "gwinizh", a gendalc'ho, a gredomp, da vevañ war an Douar. An Douar, pa vo bet pellaet dioutañ ar re a blij dezho ar gevier, al leziregezh hag ar wallentez, a vo neuze ur baradoz e-kenver ar pezh ez eo bremañ, ha brav e vo bevañ warnañ.

An diskuliadurioù a zegemerer hep ehanañ a zo holl ali war ar poent-mañ: an disparti etre an "dreog" hag ar "gwinizh" a c'hoarvazo dre lazhadegoù (brezelioù, dispac'hou, krenoù douar, hag all). Ali int war ar poent-mañ ivez: ac'han da zerou an Trede Milved e vo bet graet "oberatadur" an Douar. Goude an oberatadur e yac'hay ar blanedenn.

Frañsez Pennek

TREDE DISKULIADUR

Rua Matias Aires, 183 (Consolação)
São Paulo, Brasil

TREDE DISKULIADUR a vez kaset evit netra.